

# Recit komposet a Nevez

GANT IANN AN TAOC

WAR ZUGET **EUN TORFET** KOMETET GANT

# YVON DENEZ

HAG E ZAOU VEVEL

An dregont a viz Meurz 1878

Gnm. Plougonven — Arrond. Montroulez.

WAR DON : *Ar Plac'h libertin.*

Kristenien a Vreiz-Izel, tostaat da glevel  
Eun torfet euz ar brassa zo nevez eruet ;  
Me en disklerio dec'h, ma permet va Dane,  
Rag ne ellan ober netra enep e volontez.

Drindet santel, adorabl, roit din ar sklerigen  
Da ziskleria eur malheur ag ivez eun exempl,  
Pehini zo eruet gant tri den malevruez,  
N'ho deuz aon euz Doue nag or Salver Jezuz.

Janton Ar Rouz a voa sur eur plac'h a galon dener  
Hag a voa c'hoar da vam greg an den criminel,  
Rag e c'hoar da Janton Ar Rouz a oa inosantez  
Hag e merc'h, ervez al lezen, ne oa ket heritourez.

Janton Ar Rouz a oa eur plac'h iaouank koz-virel,  
Hag a bossede eur plas kaer barz e Kervigaoue,  
Hag e teu da zemei e nizez dan den dibordel-man  
Evit sina e danvez dan den criminal-man.

Prestig goude o eured int en em arangel  
Hag int et dirag noter vit ma vize an act gret ;  
Neuze e deuz akordet sina e danvez tout  
Nemet ma tivizaz kant skoët ar bloaz, evit e lod.

Kement kristen zo ganet a gle dont da gompren  
Ne ket re kant skoët ar bloaz evit beva pep den ;  
Neuze e oant tout kontant a rejouisset braz  
Lec'h o devoa da veza, mez nan paz pell, ziouaz !

Aben ma oa bet eur pennet o pea ar c'hant scoët-man  
E comansaz da jali var ar plac'h-paour-man ;  
Rag e unan nevoa ket anter dionte tout,  
Rag e gof a oa deut braz, a franq toul e c'houzouk.

E dintin voa deuz e di vardro eur c'hard'heur bale,  
Ha bassee e amzer eno kazi bemdez,  
A nemet injuriet a goal dredet gante,  
A vize ar plac'h paour-man goude debi e danvez.

Aliez e vije klevet oc'h ober e c'hlemou  
Hag o lavaret d'an dud eman glask va maro  
En defot na vel ac'hanon o vouet gant Jezuz,  
Eman atao e sessin gant an den malevruz.

O va Doue ! va Doue ! n'ha pebez kalonat  
E bet d'ar plac'h paour-man goude ober ar vad,  
Beza tretet, injuriet o klasq kaout ar maro  
Ha ne hean dizonti ken a n'heuz gret an dro.

Nag a veg, o va Doue ! e n'heuz bet esseet  
Ar monstr infernal-man, gant an diaoul possedet -  
Dont a ben euz eur vuez ker pur a ken divlam,  
Vit gallout, goude-ze, heuill guelloc'h e zantimant !

Eun devez, pa ne voa ken nemet han barz er guer,  
E nevoa zong, ar mizerabl, dont den em dizober  
Deuz an hini a boeze atao var e speret  
E ra e zong de c'hrouga pa vige neur gavet.

Eur gorden ebarz er gambr a neveuz bet staguët  
Hag e zong ober e dol ma nige bet gallet  
Neuze vize et ar brad, Janton Ar Rouz zo en em grouget,  
Hag Yvon Denez, ar mechant, nige bet drouk ebet.

Mez Doue a bermetaz ne eruze ket ze,  
Car Janton ne oa ket bet var dro an ti en deiz-se ;  
Neuze eo passeet ar zong-ze deuz e speret,  
Ken a oa eun neubeut a amzer goudeze passeet.

Mez allaz ! an droug-speret ne chom da baez morze,  
Hag a zigassaz dan den-man allaz ! zonzou nevez ;  
Lavaret ra d'ar meveille, pa vige o tenna dour,  
E zeuleur var e fenn er puns, a derc'hel e boutou.

Ha pa o po gret an taol e lesfoc'h e boutou eno,  
Neuze e teufoc'h dam c'haout a me o recompanse  
Demeuz o poan, o merit ; evit o paëmant  
Me a roio dec'hu eun dornat mad a arc'hant.

Mez allaz ! evit ar veag-man ne ket deut c'hoaz a ben  
An den mizerabl deuze youl dizordren  
Rag Doue a bermetaz ma vige ar c'hrim punisset,  
Hag e nige ket gallet ober e dro en secret.

An den man ne alle kousket na repozi noz de,  
Gant an dessin malevruz da c'heuill e volontez,  
Goude kement a fatig o klask ober eun torfet  
Livirit din, kristenien, e betra eo avanset ?

Allaz ! eru eo an devez hag ar moment fatal  
Da gometi eur c'hrim ken impi, ken barbar,  
Rag aliez peuz klevet ar harabolen man :  
« An hini vev en e bec'het a berisso gantan, »

Eur sadornvez vintin Denez a voa et da Vontroulez  
Evit ober e varc'hat, vel ma c'he aliez  
Hag e tigass gantan eur bara a bemp lûr.  
Evit en rei de dintin pa vige er guer eru.

Allaz ! ar zadorn da noz, allaz ! a so deuet  
Hag ar poent da vont dar guer, sioaz ! zo neur gavet ;  
Janton a ieaz raktal da ben ar goloëg  
Da lakat plouz en e boutou evel ma oa glect.

Neuze, Yvon Denez e neuz bet lavaret  
D'he zaou vevel d'hont de zicour da ober an torfet,  
Hag e neuz prometet deze betek zeg skoët arc'hant  
Mar chomjent d'he assista, evit o faëmant.

Neuze Denez, ar mechant, dezi a zo tostaët  
A, gant eun er chokant meurbet, dezi neuz lavaret  
Font dar guer e moc'h, emezan, seblantout a ra din,  
Ar plac'h paour-man respontaz, ia, gant eur muz choarzin.

Neuze Denez, ar mechant, eur pikant kar neuz kemeret,  
A gant eun tol seulamant e neuz e diskaret ;  
Mez allaz ! ar pikant kar neuze zo bet toret  
Hag ar vizerablez-man eur griaden e deuz gret.

Neuz ar boureo, tirant, dan ti zo diredet,  
E vreg da grial neuze a zo bet comanset  
En eur lavaret : « mizerabl, er veg-man out deut a ben  
» Da gometi da grim, o monst deuz an ifern ! »

Neuze ar malevruz a neuz bet lavaret :  
« O' evidont te, emezan, aze a vo dalc'het » ;  
Neuze e vam gaër, pec'hini a oa inosantez  
Ebarz en eun arc'h vraz gantan zo bet laket.

Neuze, raktal, var e vreg an nor neuz alc'hoezet  
Hag eun trench deuz an ti neuze neuz kemeret  
Hag en, neuze souden e tont adare en dro,  
Da vassakri ar plac'h paour ne oa ket c'hoaz maro.

Aben eur pennet goude e buez zo finisset  
Entre daouarn ar malevruz hag an den miliguet ;  
Mez Doue a bermetaz ma strinkaz ar goad  
Deuz ostill ar malevruz a demeuz e zillad.

An trench hag e zillad goadeg a neuz bet kempeny  
Ebarz en pen ar goloëg en euz bet o-laket,  
O sonjal penoz biken na vize dizoloët  
Ar c'hrim-ze ken barbar euz an den milliguet.

Allaz ! Janton Ar Roux er veg-man e gret o tro.  
O niz prob a zo bet evidoc'h ho poureo  
Janton Ar Roux zo maro, Doue d'he fardono !  
A gras dei da bossedi rouantelez an Envou.

Neuze, pa neuz gret e dro, a nevez bet sonjet  
E zama var e geign hag e c'hass kuit mar galje  
Adreuz dre ar parkeier ; en hent e neur gavet  
A var e c'heign, er foz, eno e neuz hi laket.

E bizag gand e mouchouer a neuz bet goloët  
Hag e bara a bemp lur en e c'hichen laket  
Neuze e oa leusket eno da basseal an noz  
Hag an den malevruz-man a oa et da repoz.

Dar zul vintin, mintin mad, tud a basseaz abiou  
O font d'an oferen vintin, da chapel Kerbiriou,  
Hag en eur gavent soezet o velet ar plac'h-man eno  
Mez n'ho devoa ket nep doëtans e oa oman maro.

Unan euz meveillen Denez a c'heaz da velet ivez  
Evit dissimuli a dre guriosite ;  
Denez a oa ivez et dan oferen vintin  
Ar mevel, pa neuz goelet homan, zo et de rancontri.

Pa neuz guelel eman e vestr e cri : « Pebeuz malheur braz !  
» O fintin a zo duont lazet en foz an hent braz » ;  
Hag en o comans da grial d'ober grimasou goëla  
Mez daërou deuz e zaoulagad zur ne deue berad.

Neuze en kichen ar c'horf int bet en em gavet,  
En pelec'h e voa dija eur bobl tud assamblet,  
A Denez a lavaraz, pa en deuz e goelet :  
« Daoust piou e ar malevruz neuz an torfet man gret? »

An dud a oa eno assamblet neuze e lavaraz :  
« Piou a zonj dec'h ve capabl dober eun torfet kerbraz,  
» Nemet an hini a oa pell zo oc'h essa ober  
» A pa neuz kavet e du a neuz gret e afer. »

Unan deuz ar voarzet da Blouigneau zo bet et  
Da zenons dan archerien e oa gret an torfet,  
An archerien, pa gleffont, a zo braz estonet  
A kerkent var o c'hezeg e zint bet partiet.

Neuze, pa int en eur gavet, o deuz bet interroget  
An amezeyen divardre evit gout ar sujet,  
A tout o deuz lavaret e oa Denez, ar mechant,  
A renke beza an auteur deuz an torfet sanglant.

An archerien raktal zo et da gaout Denez  
Evit gout hag en lavarje deze ar virionez ;  
Mez Denez a lavaraz certen ne entente ket  
E vije e nep feson, e nep tra tamallet.

An archerien neuze a lavaraz dezan ;  
« Savit o torn neuze dirag ar Groaz aman ; »  
Mez ne zavas ket e zorn hag e liou a chenchaz  
Mar teuas d'en em c'holo deuz liou eur c'hriminel braz.

Allaz ! neuze souden gante e bet kasset  
D'ar prison, da Blouigneau, a gante interroget  
A kunduet da Montroulez d'an de varlerc'h vintin.  
Setu keuz d'ar malevruz a kalz euz a chagrin.

Ar c'horf a zo bet kasset d'he c'hamp, dar C'hroaziou-Meign  
En pelec'h zo bet renket ober c'hoaz kalz a dreign ;  
Ar vedesinet ivez deuz Montroulez zo bet et  
Da vizita ar c'horf paour, da c'hout pelec'h voa blesset.

E enteramant a zo gret en iliz Zant-Eutrop  
Gant eur solanite vraz hag eun imans a boll  
Janton Ar Rouz zo maro, Doue de fardono !  
Er bed all vimp da viken, ar bed-man, ne ket hor bro.

An archerien a vize er C'hroaziou-Meign bemdez  
Oc'h interogi an dud, evit gouzout ar wirionez ;  
An daou vevel, ivez, a zo bet interoget  
Hag an hini iaouanka neuz ar virionez diskleriet.

Allaz eo da emezan red eo din lavaret,  
N'hon ken evit derc'hel ar pezh a boez var va speret,  
N'hi on devez resevet beb a zeg skoët digantan  
Evit d'hont d'he assista d'ober an torfet-man.

Laret ra dan archerien : « Deut da ben ar goloëz  
« A me a ziskoela dec'h neuze an dillad goadeg,  
« Hag an trench a bec'hini e bet en em zervijet  
« Evit ober e grim-da laza e voerep. »

Neuze, an archerien a zo kontant rentet  
Pe devez a dra zerten ar virionez klevet,  
Neuze an daou vevel a zo bet destumet  
Rag ne chomje ket ar c'hrim ep beza punisset.

Yvon Denez, ar mechant, pa e bet interrojet,  
En tribunal Montroulez, e neuz bet lavaret  
Ar virionez pen-da-ben d'ar jureno neuze  
E voa en an torfetour demeuz ar malheur-ze.

Pevarzeg test zo bet interojet en Kemper  
Var ar memez sujet, evit ar memez afer,  
A tout o devez savet o moez a enep Denez  
O krial venjans varnan, o c'houlen e vuez.

Goude an interrogation zo gret gant an testo  
President ar C'hour d'Assis a gondaon Denez d'ar maro ;  
Hag ar mevel iaouank a neuz tapet deg vloaz,  
Hag an hini koz a neuz tapet uguen vloaz.

Yvon Denez, ar mechant, ne reaz van ebet  
Vit klevet prononsi ar sentans a varo en e enep ;  
Eman a oa eun den kaledet en e bec'het,  
Pedomp Doue evitan ma vezo pardonet.

O afer da Bariz neuze zo bet kasset,  
E avocat da Zenez a neuz bet lavaret  
Penez ne voa ket bet lennet e brezonek  
An articlou deuz o c'hrim de, gant ar jureet.

President ar Republik a neuz bet repousset  
An afer da veza adjujet e Goenet ;  
Mez barnerien Goenet o c'hondaon a nevez  
Da zoufr ar memez poan vel mo deuz bet e Kemper.

Deuz a Vened da Bariz o afer zo kasset  
Dar C'hour a Gasasion, da veza examinet,  
Mez eno ez eo kavet ivez re vraz o c'hrimo,  
Hag Yvon Denez, adare, zo kondaonet dar maro,

An den kriminel-ze er prison a glevaz  
A beurz eur beleg zantel, re zivezat, ziouaz !  
Kalz kelennadurez euz e foutou tremenet,  
Evit goulenn euz Doue ma vize pardonet.

Deuz a fons e gachot e krie gant eston :

« Me a zo eun exempl da oll tud va c'hanton ;  
» Lazet e meuz va zintin, evit kaout e arc'hant,  
» Me gle pea va c'hrim dre euz c'hriz chatimant.

» O ! arc'hant milliguet, pen cauz demeurez va c'hrim,  
» Te ra en pep amzer, ziouaz ! meur a victim,  
» Perag na deuz raktal ar douar dam lonka,  
» Er moment ma veuziz va zintin en e goad. »

Allaz ! an amzer prescrivet o veza echuet,  
Da guer a Vontroulez ez eo bet digasset,  
Hag eno, var ar blassen, dirag eun imans a dud  
E neuz bet echuet e vuez malevruez.

Neuze, euz ar prison ez eo bet digasset  
Gant daou veleg santel en kichen ar potans dresset  
Ag eno, a voez hucl, e neuz bet lavaret  
Ar chomzou truezuz-man dan oll assistantet :

« C'houi oll, tud Montroulez, tud koz a iaouankiz  
» A ia da veza test demeurez va goall suplis  
» Sellit va fin ken infam, karit atao ar vertuz  
» Hag e vezot bepret guir vugale Jezuz.

» Pardon, ô va Doue ! pardon va fried ker !  
» Pardon va zad, va mam, pardon tud va c'hartier  
» Just eo din-me zoufr hirio eur suplis ker garo  
» Pedit oll evidon, mont a ran d'ar maro !

» Rei a ran va c'horf paour en chatimant hirie,  
» Va ene a roan, o krena, da Zoue,  
» Ra deurvezo e reseo ebarz e garante  
» A gras mer possedo hed an eternite. »

**TAOC.**

FIN,

*(Propriété de l'auteur.)*

---

---

---

# CHANSON

AN

# Infirmerien

---

WAR. DON : *An Eferien.*

Me o ped, va mignonet,  
Tostañt aman da glevet;  
Me lavaro dec'h pen-da-ben  
Ar boan o deuz an infirmerien;  
Vidon me a lavar, en eur guer ber,  
Ne ket brao beza infirmier.

Sevel a reont deuz a beure,  
Diou a teir heur a rog an de,  
Hag a aliez, epad an noz,  
Nen euz ket eun heur a repos;  
Vidon me lavar, en eur guer ber,  
Ne ket brao beza infirmier.

Evidon me a lavar, franchamant,  
Eman bemdez en tourmant,  
Guell e beza mevel en ifern  
Evit ma e beza infirmier;  
Evidon-me a lavar, en eur guer ber,  
Ne vin ket tapet ken da infirmier.

Deuz ar mintin, vel ma savo,  
Neuze ar re glan e c'houlenno :  
« Deuz aman din an dra-man,  
» Non ket ezet var an tu-man » ;  
Vidon me a lavar, en eur guer ber,  
Ne ket brao beza infirmier.

Gant ar seurezet zo quer taignous  
Hag a re glan zo quer grignous,  
Goude klevet kement a sotoni ;  
Renkout rinsa kement a loustoni ;  
Vidon me lavar, en eur guer ber,  
Ne ket brao beza infirmier.

Elec'h touch bep mis deg lur  
Ec'h c'honeont deg skoët, a dra zur,  
Rag me a lavar, franchamant,  
Eo revian o feamant ;  
Hag a lavar, en eur guer ber,  
Ne ket brao beza infirmier.

Ha c'hoas, dreist o oll labouriou,  
E renkont rei lavamanchou,  
Goude vida ar c'hrenchouerou,  
Hag ivez rinza ar baquejou ;  
Vidon-me a lavar, en eur guer ber,  
Ne ket iac'hus beza infirmier.

An hep en deuz ar zon-man gret,  
Ne evit facha den ebet,  
Cant un infirmier loz e komposet  
En hospital, var e vele ;  
Hag a lavar, en eur guer ber,  
Biken ken na ve infirmier

**TACC.**

FIN.